

AR C'HI DU

Méto. ♩ = 69 environ.


Kanet gant Louis PIRIOU, euz Kerstrat, par-
rez Tregunc — 31 mai 1964. H. G.



Di - chul (1) vin . tin, 'vont d'an o -



fern, Med ar c'hi du 'n poud an di - en, Oh!



oh! ton - la-di, ton-la-di, Oh! oh! ton-la-di - do.

2

Ar meul (2) a lare d'ar vatez
Krog enn he lost ha tenn haon (3) meaz
Oh! oh!...

3

Krog en he lost, ha lip he benn
Car pec'hed ao (4) koll an dien
Oh! oh!...

4

Ennez zo eur chiik (5) du mad, dis-
[kouet (6) ganen
Guelc'hel (7) loiaiau ha skuidili
Oh! oh!...

5

Guelc'hel loiaiau ha skuidili
Gant brank he lost haon skub an ti
Oh! oh!...

6

Kas al leuiou bihan e meaz
Ha digellienna ar vatez
Oh! oh!...

7

Ober rec c'hoaz 'n draik ouспен
Monet d'ar ster gant lianen
Oh! oh!...

8

Monet d'ar ster gant lianen
Ma dousik koant o guelc'her guen
Oh! oh!...

9

An oac'h (8) o ont (9) d'ar c'hardi forn
Eur goutal vraz gathon 'n he zorn
Oh! oh!...

10

'N hani (10) 'n euz choant da gaout cher
Na neuz med donet d'ar Foload [vad
Oh! oh!...

11

Eno gao (11) da jejuni
Eun pladad mad a sklipou ki
Oh! oh!...

12

Ar vec'h Helen a ouele dru
Gant ar c'heunz braz d'he chiik du
Oh! oh!...

13

Tevet, ma merc'h! na ouelit ket
Chas du awalc'h e vo kavet
Oh! oh!...

14

Chas du awalc'h e vo kavet
Mes ken diskouet ne vezo ket
Oh! oh!...

(1) Dichul : disul ; (2) Meul : mevel ; (3) Haon : anezhan ; (4) Ao : eo ; (5) Chiik :
kiik ; (6) Diskouet : desket ; (7) Guelc'hel : goalc'hi ; (8) Oac'h : ozac'h ; (9) Ont :
vont ; (10) 'N hani : 'n hini ; (11) Gao : gavo.